

Son ar Pinard

(Son nevez)

I



Me zo eur paour keaz den daonet
Gant ar boëssoun e zoun kollet,
Kar pa goumansan da eva
Ne c'hoezan ket peur chom a za.
A fors da eva odivi
Ez eo dija ruz beg va fri,
Ha pa vezan mezo dija
Deostu me a stag da gana. (Diskan)

DISKAN

Pinard. Pinard,
A zo mad da gas kuit ar c'hafard } *bis*

II

Pa eruan er ger mezo
Va hini goz a za en dro,
Gwelet o vez e c'hober gaol
Tigass traou d'in-me war an daol :
Ar c'hig, ar bara, ar gwin gwen,
Buhan vez digasset em c'hichen ;
Ha 'pad ma vezan o lounka
D'ezhi me a stag da gana. (Diskan)

III

Gant va greg, pa 'zan da gousket,
Ne joman ket gant ar sec'het ;
Lakat a ran kichen va fri
'N anter galopin odivi

Ha peder voutailhad gwinn koz
'Vez kuzet mad 'barz an daol-nnoz ;
Pa deu da va greg divuna
Klev c'hanon atao o kana. (Diskan)

IV

Pa vezin skoet gant ar maro
War-zug an env me a ielo ;
Pa deui sant Per zigeri d'in,
Me laro dean en eur c'hoarzin :
Aman z' boëssoun kamarad koz
Deuet gan-en d'ar Baradoz ;
Ha 'pad ma vezo oc'h eva
Dezhan me stago da gana. (Diskan)

V

Ma vezan taolet en ifern
Eno bakin ket ar sifern
Klevet 'm euz tud o lavaret
Eno vezer ket siferniet ;
Pa deui an diaoul gant e gerniel,
Pa velo 'r voutailh em godel,
Kregi raio em litrad gwinn
Hag e kano en eur c'hoarzin. (Diskan)

FRANCIS MOAL.

